

Foire de Lerneven, lundi 26 oct 1936 (17)

VA MAMM GAER HA ME

Son nevez, savet gant Claude **RAOUL**

I

Eiz dervez 'zo m'oun dimezet
Me 'meuz bet kalz a boan speret.
D'eoc'h holl kerent ha mignounet
Me 'zo e vont da lavaret dioustu
Tur-lu tur-lu tu-tu

II

Oh! me a gav hirr an amzer
Gant ar boan a meuz gant va mamm gaer.
Deiz va 'euret, diouz ar mintin,
E tifennaz ouzin eva gwin.

III

Poa drebet ar friko, goude leinn,
Oa deuet da lavaret d'inn,
En eur ziskouez va mestrez :
« Diwall petra d'hober d'hounnez ».

IV

D'ann abardaez, poa deuet an noz,
Me ioa eat gant va hini goz
Da di 'mamm gaer evit kousket ;
Ner enem gaout oamp gourdrouzet.

V

Red eo lavaret, va zud keiz,
Me 'zo gannet war an eur diss !
'Rag pa voamp eat en horr gwele
En taol kenta torret r 'sommier.

VI

Va mamm gaer he doa klevet
Ha ioa deuet ive da velet :
« Setu aman 'vad eun aoutrou
Hag a d'horro an holl draou ».

VII

Mez a force d'eomp da glevet traou
Ni n'em roaz da gousket on daou.
Pa d'heu mamm gaer evit gervel :
« Atta feneant, poent eo sevel ».

VIII

Mez ni a reaz skouarn vouzar.
Mamm gaer a ioa eat en he gar
Hag en eur iouc'hall a bouez he fenn
E tanfoultraz warnhomp dour hien.

IX

Setu ma v'oamp savet neuze,
Hag eat ouz taol 'vit eva kaffe.
Mamm gaer atao drouk en en 'hi,
Ne miche ket va dijuni.

X

Er zul warlerc'h, evel atao,
Me ieaz da c'hoari domino
Evit tremen va amzer
Ha kas kuit kafar va mamm gaer.

XI

Poan deuet en dro, klask m'ont en ti
Oa serret an n'hor ouz va fry.
Va greg a ioa eat de gwele
Mamm gaer en e c'hichen ive.

XII

Ha me terri ar prennest
Evit mont da gaout va mestrez,
Anter vezo va ginou,
Ha me e kreiz e trezo 'diou.

XIII

Mamm gaer e devoa choant iouc'hall,
Me lavare d'ezhi gedal,
Pa miche great ouz va hini
Ha rafenn ive evel d'ezhi.

XIV

Hag abaoue va mignonnet
Va mamm gaer me neo ket bet
He klask dont ken 'barz em gwele.
D'ho mammou kaer grit holl 'velze.